

Ma jardin

War vord ar c'hoadig pin, me 'moa bet ur jardin, (x2)(Kaner ha diskanerien goude)

(kaner/solo) Ar jardin a oa din war vordig an hent pras,

Tout an dud a lâre din ha ma jardin ha ma jardin,

Tout an dud a lâre din ha ma jardin ne oa ket din (x2).

En-dro d'ar jardin-se me 'moa savet ur c'hleuz, o (x2)

Ar c'hleuz 'oa d'ar jardin, ar jardin a oa din, war vordig an hent pras...

Ha war ar c'hleuzig-se 'oa diwanet ur wezenn, o (x2)

Ar wezenn 'oa d'ar c'hleuz, ar c'hleuz 'oa d'ar jardin, ar jardin a oa din war vordig...

Ha war ar wezenn-se 'oa bet kresket ur brank, o (x2)

Ar brank 'oa d'ar wezenn, ar wezenn 'oa d'ar c'hleuz, ...

Ha war ar brankig-se 'oa bet savet un neiz, o (x2)

An neiz a oa d'ar brank, ...

Ha 'barzh an neizig-se 'oa bet dozvet un u, o (x2)

An u a oa d'an neiz, ...

Ha deus an uig-se 'oa bet ganet un evn, o (x2)

An evn a oa d'an u, ...